

BREIZH

hag

AR BED



Bro INDEZ

AR YETI

Meur a vloaz 'zo bremañ ma komzer eus al loen iskis anvet "yeti", pe c'hoazh "den spontus an erc'h", hag a vev, a lavarer, war uhelañ menezioù hanternoz Bro-Indez. Biskoazh n'eus bet paket unan, met roudoù treid a zo bet gwelet alies. Ur bagad tud, en o fenn ar c'helenner amerikan Norman Dhyrenfurth, a zo aet da glask petra eo al loen-se e gwirionez, un doare arzh pe un doare marmouz. Kavet o deus e vev al loened-se e toullou-douar, hag ez eus daou rumm anezho, unan war-dro 1 m. 40 hag egile war-dro 2 m. 60 a uhelder. Ur yeti a zo bet gwelet ur wech gant un ezel eus ar bagad, met hemañ a zo bet ken spontet ma n'eo ket chomet da sellout.

SKOL DRE LIZHER « OBER »

COURS DE BRETON PAR CORRESPONDANCE

A-drugarez da « Skol OBER » o deus gallet ur bern tud studian ha deskin ar Brezhoneg.
Perak ne rafec'h ket evelto?
Kasit hoc'h anv da « Skol OBER » - « Skol OBER », ar skol vrezhonek koshañ oc'h ober gant an dea-reañ nevesañ!

C'est grâce aux cours « OBER » que beaucoup de nos compatriotes ont appris le Breton ou ont perfectionné leur connaissance de notre langue.

Depuis plus d'un quart de siècle, les Cours « OBER » sont à l'origine de la vocation littéraire de nombreux jeunes écrivains.

Skol « OBER » vous fera faire des progrès rapides. Ses méthodes modernes s'adapteront à votre cas, soit que vous soyez d'une région où l'on ne parle plus notre langue et que vous désiriez reconquérir cette base essentielle de notre culture celtique, soit que vous connaissiez la langue parlée et que vous désiriez compléter votre formation bretonne en accordant à sa très belle littérature moderne.

Les cours « OBER » sont gratuits.

Skol « OBER ». Directrice : Mlle Gourlaouen, rue de la Corderie, Douarnenez (Bretagne).

Renseignements sur demande.

ÉTUDE et ENSEIGNEMENT (AL LIAMM)

COURS ELEMENTAIRE DE BRETON Roparz Hemon, 380 lur

GRAMMAIRE BRETONNE gant Roparz Hemon, 310 lur.

GERIADUR ISTOREL
gant Roparz HEMON
levrenn gentañ, 224 pajenn.
1.200 ha 1.000 lur

DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS gant Roparz Hemon, 600 lur

DICTIONNAIRE FRANÇAIS-BRETON gant Roparz Hemon, 600 lur

ISTOR AL LENNEGEZH
VREZHONEK
gant Abeozen
1.500, 1.200 hag 800 lur.

KAMP AR VREZHONEGERION

LE CAMP INTERNATIONAL DES BRETONNANTS a lieu chaque été. On peut y suivre des cours, des conférences, des séances récréatives, des promenades et excursions. Vacances idéales qui vous familiariseront avec la pratique de la langue bretonne. On y passe les examens du Tre'h. Renseignements : M^{me} Vefa de Bellaing - Ar Vali - Guingamp (Bretagne). E Kamp ar Vrezhonegerion e kavot keneiled a-zoare.

BUANOC'H - BUANAN (U.S.A.)


Un ijin a zo bet graet er Stadoù-Unanet, un doare fuzeennig, a vez staget gant lerennoù war gein un den. Gant ar fuzeenn-se e c'hell an den redek ken buan hag ur marc'h, lammat dreist stêrioù, pignat gant mogerioù uhel, ha kement-se hep skuizhañ.

Evit
HO PEAJOU
er
BROIOU ESTREN
goulennit
diskleriadurioù
digant

HOTEL-PLAN

49, Av. de l'Opéra
PARIS-2^e

Pellgomz OPÉ. 47-10



Diskouezadeg Brussels
AN ATOMIUM

HOTEL
PLAN

Bretoned... BREIZH a vevo

KEIT HA MA CHOMO BEV ar BREZHONEG

Evit rein skoazell d'ar re a labour evit ar Brezhoneg

Prenit, lennit ha roit LEVRIOU ha KELAOUENNOU...

e BREZHONEG



BREIZH hag AR BED



Embannet gant "BRUDAN ha SKIGNAN"

B

Ha lenn a rit ar gelaouenn "SKOL" ? enni e vez displeget kudennoù ar yezhoù e Breizh hag er broioù all ; danvez-studi evit ar vugale ; alioù, di-babet diwar skiant-prenan, war an doareoù kelenn a-vreman ; h.a.

Renet eo "SKOL" gant an Aotrou KALVEZ, rener SKOL SANT ERWAN e PLOUEG-ar-Mor, Koumanant : 800 Lur. A. Le Calvez, Plouézec, C.-du-N. K.R.P. 19 1106 Roazhon.

Ehanoù er Vro
Vacances en Bretagne

"BREIZH NEVEZ"

Pension de famille à PLOUGRESCANT (Côtes-du-Nord)
AR MOR - AN TRAEZHENNOU - AR MAEZHIOU a Vro DREGER
La Mer - Les Plages - La Campagne du Trégor
KELAOUENNOU ha LEVRAOUEG - KENTELIOU BREZHONEG
Journaux bretons et bibliothèque - Cours de Langue bretonne

AL LIAMM



Pelec'h kavout pennadoù a bep seurt da lenn ?..

Pezhioù c'hoari, kontadennoù, danevelloù, studiadennou, barzhonegoù, keleier eus Breizh hag eus ar Broioù Keltiek... h. a. War ar gazetenn «AL LIAMM», 500 pajenn embannet bep bloaz e stumm levrennoù moulet mat ha sklaer.

1.200 lur ar bloaz hepken ! (kasit muioc'h ma c'hellit. Talvezout a raioc'h arc'hant da vrasaat ha da gaeaat ar gelaouenn). P. Le Bihan, 6 Domaine des Hocquettes, Suresnes (Seine). C. c. p. 534 906 Paris.

Goulennit ur skouerenn evit netra evit gwelout peseurt labour a ra Al Liamm evit ar Brezhoneg.

Klaskit koumananterion nevez evit Al Liamm e mesk ho mignoned. Setu an doare wellan da skoazellan ar gelaouenn.



Pelec'h kavout levrioù kaer ha plijus ?

Levrioù evit ar re vras hag evit ar vugale. Setu aman lod eus Levrioù Al Liamm.

EVIDON VAN-UNAN ; barzhonegoù gant Ronan Huon, 800, 650, ha 460 lur.

AN ANTEKRIST : pezh c'hoari gant Tangi Malmanche, 320 ha 180 lur.

AR SPONTAILH : pezh c'hoari gant Jarl Priel, 48 ha 350 lur.

AQUIS SUBMERSUS : romant gant Storm, 280 ha 150 lur (troat gant Per Denez).

KLENVED AN TOGN : pezh-c'hoari gant Jarl Priel, 150 ha 100 lur.

GAOVAN HAG AN DEN GWER : danevell gozh, gant R. Hemon, 50 lur.

AR C'HORF DINDAN DREID VA ZAD KOZH : romant-polis, gant R. Hemon, 50 lur.

BISOUSIG KAZH AN TEVENN : danevell gant Abeozen, 120 lur.

BARZHAZ « kant barzhoneg berr » gant barzhed anavezet etre 1350 ha 1950, 400 lur.

MABINOIGION AR VUGALE : danevell gozh gant K. Riou, 80 lur.

BARZHONEGOU (un dibab) gant Jakez Riou, 100 lur.

BARZHONEGOU gant Ker-verziou, 600 ha 400 lur.

MERC'HIG AR ROZENN gant Andersen, 150 lur.

ROBINSON KRUSO gant De Foe, 180 lur.

PAOTRE VARV GLAS gant Perrault, 150 lur.

AR C'HEMENER BIHAN KALONEK : gant Grimm, 180 lur.

ISTOR MEUDIG gant Perrault, 190 lur.

AR GOANTENN E KOAD AR C'HOUSSK gant Perrault, 190 lur.

AR CHAZH GANT HEUZIOU LER gant Perrault, 190 lur.

An ARABED o deus o radio. Tud BRO ALZAS ivez

perak n'eus ket

ur Radio e Brezhoneg evit ar Vretoned?

B. ha S.

3 levr NEVEZ evit ar vugale :
KABELLIG-RUZ,
LUDUENN, 150 lur al levr.
GWENN-ERCH)

VA ZAMMIG BUHEZ : gant Jarl Priel, 800 ha 495 lur.

VA BUHEZ ERUSIA : gant Jarl Priel, 1000, 800 ha 495 lur.

AMAN HAG AHONT gant Jarl Priel, 1500, 1.200 hag 800 lur.

GEOTENN AR WERCHEZ gant Jakez Riou, 850, 550 ha 400 lur.

TRISTAN hag IZOLD
gant LANGLEIZ
5.000, 1.800, 1.200 hag 850 lur.
Ul levr eus ar re gaeañ.

Skrivan ha kas an arc'hant da :
P. Bodenan, 3, chemin des Potiers,
Ergue-Armel, Quimper. C. c. p. :
212-23 Rennes.

Gant kalon e kendalc'h renerion Al Liamm da embann ar gelaouenn ha da lakaat moulan levrioù.

Un dlead eo evit pep Breizhad o skoazellan da ledanaat tachenn an embannadurioù.

Bro ITALIA

AR C'HI FIDO

Ar c'hi Fido a oa brudet dre Italia a-bezh. Un deiz, e 1941, ur micherour, Carlo Soriani, eus Luco di Mugello, e-kichen Firenze, a saveteas buhez ur c'hi bihan a oa o veuziñ en ur stêr. An den hag al loen a voe diwar neuze mignoned vras. Bep mintin, Fido a yae gant e vestr betek ar c'harr-boutin a gase anezhañ d'e labour. Ha bep abardaez, Fido a yae d'e c'hortoz pa zistroe. Un abardaez a viz Kerzu 1943, ar mestr ne zistroas ket. Lazhet oa bet gant ur vombezenn taolet gant ur c'harr-nij. Koulskoude, Fido a yeas da c'hortoz e vestr an deiz war-lerc'h, hag an deiz war-lerc'h c'hoazh. Bep abardaez, hep koll kalon, e oa eno pa zistroe ar c'harr-boutin. Alies e chome dindan ar c'harr a-hed an noz. Un nebeut mizioù 'zo e voe roet da Fido ur vedalenn aour gant ar maer. Siwazh, Fido a gouezhas marv en deiz all, hag eñ o redek etrezek ar c'harr-boutin. Douaret eo bet ekichen dor ar vered ma emañ beziet e vestr.

BRETONED... o chom e PARIS

evit ho LUC'HSKEUDENNOU
un den eus ar Vro a labouro laouen evidoc'h

Andreo FLEURY

8, straed Trévisé, PARIS (9^{vet} A.)



war ho koulemañ e vo en ho ti !..

Pellgomz : PROVENCE 74-50

Ar pennadoù moulet
aman a zo bet kemeret
war ar gelaouenn
AR BED KELTIEK
21, Straed Dixmude
Sant-Mark - BREST

LENNIT
KAERAN LEVR AR BED !..
AR BIBL.

Goulennit roll al lodennoù embannet digant : an Dimezell Sant-Gall de Pons. Kersperz. LOUANEC. C.-du-N.

HOR YEZH, kelaouenn a yezhoniezh,

Istor ar yezhoù keltiek, ar rannyezhoù, geriadur ar vuhez breman...
Ur skouerenn evit netra. Skrivit da : HOR YEZH, Maen ar Ya, Kastellin.